


78  
A



# MEULEUDI

## ITRON VARIA BREIZ.

Kan 29 euz tonio Dom Herry.

Tud bro Treger , kanerien gaer ;  
Tud a Gerne , gwisket ken kaer ;  
Breiziz Leon , flour ho prezek ;  
Potred Alre , tud kalonek ;

Potred Breiz-Izel , ma zud vad ;  
Tom a galon ha skanv a droad ;  
D'in leveret , d'in leveret ,  
Pelec'h oc'h bet , na pelec'h et ?

Monet a reomp da westla ;  
Rei prof d'an Itron Varia ;  
Da bidi mam ar Vretoned ,  
Brasan Santez a zo er bed.

Me micherour , me labourer ,  
Me zo soudard , me devejer ,  
Me zo mevel , me zo matez ;  
Ni ia da welet ar Werc'hez.

Me oa , boa seiz vla , pistiget ,  
Gand un drouk pen hep peuc'h-ebet ;  
Ed eo kuit ma drouk pen breman :  
Mil benoz da vam an dud klan !

Me am boa poan ha melkoni ,  
( Aliez , siouaz ! hon euz-ni ! )  
Ganti ec'h on bet diboaniet ,  
Ha mont a ran d'he darempret.

Me am boa klan ma oll loenet ,  
Pa bidiz mam Doue gavet ,  
Ganed entre daou aneval ;  
Hag hi zo deut da vad raktal.

Me oa en eul lestr o veui ,  
Pa n'em westliz da vont d'he zi ;  
Ar Werc'hez e deuz ma c'hlevet ;  
Me ia breman d'he darempret.

Me, oa ma mam war he gwele ,  
He dorn em dorn me a wele ;  
Me gan breman , deut eo da vat.  
Gwerc'hez Vari , trugarekat !

Me 'm-boa ma mab en he gavel ,  
Hac hen ien , o vont da vervel ;  
D'ar Werc'hez he westliz timad ;  
Ha chetu hen breman iac'h , vad !

Me a oa mud hag e komzan ;  
Me oa bouzar hag e klevan ;  
Me a oa dall , ha me a wel ;  
Mil bennoz d'ar Werc'hez santel.

Me oa en Aljer er brezel ,  
Pell, siouaz ! euz a Vreiz-Izel ;  
Ha me d'an douar diskaret  
Gant eun tenn kanon em boa bet.

Ha me sellet ouz an envo ,  
O skuillan goad a boulado ;  
Ha me gervel mam ar Zalver :  
D'ac'h en em westlan , mam deuer.

Oa ket ma c'homz peur-lavaret ,  
Ar Werc'hez a zo dizkennet ,  
Ha gand he daouarn biniget  
Ma goullo e deuz serret.

Pa'z on distroet war ma c'hiz ,  
Gwerc'hez , me rai tro hoc'h iliz ,  
Diarc'hen koulz ha diskabel ,  
Em roched goadeg a vrezel.

Oh ! n'eo ket gaou a lavaraz  
An tado zantel a skrivaz :  
« Biskoaz den n'en deuz ho pedet ,  
» Gwerc'hez , hep bean chelaouet. »

Chelaouet c'hoaz ar Vretonet ,  
D'ar mare ma vezint barnet ;  
Pedet neuze c'hoaz evidomp ;  
E c'harz ho treid her goulenomp.

Leveret d'ean : « ma map me ,  
Leket ar Vretoned en E ;  
Dre ar c'hov en deuz ho touget  
Digoret d'eze , me ho ped.

Tud a Vreiz-Izel int , tud paour ,  
Tud vad , brevet gant al labour ;  
Tud gant an aler a dore ,  
Dre galz poan , an douar bemde.

Tre-walc'h , tre-walc'h ho deuz c'houezet ;  
Poanio tre-walc'h ho deuz-hi bet ;  
Tre-walc'h ho deuz skuillet daëro ;  
Roet d'he peurz en ho joaio. »

Neuze tei Doue da respont :  
« Dont er Baradoz ec'h hellont ;  
» Karet a ran ar Vretonet ,  
» Pa garont ma mam viniget. »



## AR RETRED.

78 B

— — —  
War don : *Plaisirs inouïs.....*

Er retred e zo  
Kalz graso talvouduz ,  
Plijadurezo  
Santel ha diduuz :  
Demb oll da danvad ane ;  
Demp , galved omp gant Doue.

Jezuz he-unan  
A gare ar retred ,  
A gare , laran ,

Kuitat trubuil ar bed  
Evit monet da guzet  
Ha da bidi a speret.

Alian a re  
An Ebestel wech-all  
Da voned ive  
Da ober kemend-all :  
Kelliez Sant a zo bet  
En deuz karet ar retret.

Euz ma ine kez  
Ar goulio spontuz  
Hag an dienez  
Euz ho kraz, ma Jezuz,  
A ra d'in mont d'ho kavet  
Ma vin genac'h diboaniet.

Doue ma c'hrouer  
Braz he c'halloudegez,  
Jezuz ma Salver  
Hep par he vadelez,  
Ha ma barner er bed all,  
A fell d'in en ze sonjal.

Sonjal er maro  
Er varn a zei goude ;  
Klask ma fec'hejo  
Kovesad aneze :  
Gant keu neb ho anzavo  
A iel daoust d'he d'an Envo.


An ivern welan  
Digor ouz ma gortoz  
Ma ne gemeran  
Prim hend ar Baradoz :  
Dal m'her sonjan ar spouron  
A ra krenan ma c'halon.

Red eo tevel kren  
E tro pad ar retred,  
Neuze ar beden  
Zo gallouduz mœurbed

Vit lakad Otro Doue  
Da ober d'imp trugare.

Dal ma zistroer  
A wir galon outan  
Raktal e kaver  
Hep mar-ebed enau  
Eun tad leun a garante  
E kenver he vugale.

War hon pec'hejo  
Mad eo gwelan dourek,  
Demb er retrejo  
Da skuilan daëro c'houek :  
Demp da welc'hi aliez  
Gante hon fallagriez.



## AR BARADOZ.

78 C

### Kan 40. Dom Herry.

Jezuz ! hag hen braz vo  
Eur-vad an ineo  
A vezo gant Doue  
Digemeret en E !

An amzer gavan ber ,  
Hag ar poanio dister  
O sonjal de ha noz  
En gloar ar Baradoz.

Pa zellan en envo  
Hag entreuze ma bro ,  
Nijal di a garfen  
Evel eur goulmik wen.

Pa vo tol ar maro,  
Neuze me gimiado  
Ouz ar c'hig ankenius,  
Eneber da Jezuz.

Gant joa e c'hortoan  
An tremen divean :  
Hast am euz da welet  
Jezuz ma gwir bried.

Raktal ha ma vezo  
Torret ma chadeno ,  
Me a zavo en er  
Evel eun alc'houeder.

Tremen a rin al loar  
Evit monet d'ar c'hloar ;  
Dreist an heol , ar stered  
Me a vezo douget.

Pa vin uz d'an douar ,  
Traouien leun a c'hlac'har ,  
Me rei neuze eur zel  
Ouz ma bro Breiz-Izel.

Neuze me lavaro :  
Kenavo dit , ma bro ,  
Kenavo da viken  
Kenavo , peb anken.

Kenavo , dienez ,  
Kenavo , peb enkrez ,  
Kenavo , trubuillo ,  
Kenavo , pec'hejo .

Pelloc'h ne doujin ket  
Ardo an drouk-speret :  
Biken me n'em gollo  
Goude tol ar maro .

A bep tu pa zellin ,  
Kement tra a welin  
A rai d'am daoulagad  
Ha d'am c'halon oll vad .

Dorio ar Baradoz  
Digoret d'am gertoiz  
Ar Zent ha Sentezet  
Ouz ma digemeret.

Me vo digemeret  
En palez an Drindet  
En kreiz an enorio  
Hag ar meulodio ;

Hag enon , evit mad ;  
Welin Doue an Tad  
Gant he Vap beniget  
Hag ar Speret meulet.

Me a welo Jezuz ,  
En eur c'hiz diduuz ,  
O lakat war ma fen  
Ar gaeran kurunen.

Ho korvo evuruz ,  
A lavaro Jezuz ,  
Oa tenzorio kuzet  
En douar biniget.

Evel grouio roz gwen ,  
Pe dorkado spern-gwen ,  
En kornig eul liorz ,  
E m'oc'h e kreiz ma forz.

Evit poanio dister ,  
Evid ankenio ber ,  
Me am bezo er c'hloar  
Pouez mad ha muzul bar.

Goud'ar maro heb ken  
E welo ar c'hristen  
Petra dal en Envo  
He oll vad-obero.

Kaer a vezo gwelet  
Ar Werc'hez veniget ,  
Gant daouzek stereden  
A ra e c'hurunen.

Gwelet a rimp ouspen,  
Gante peb a delen,  
Ele hag Arc'hele  
Oll o veuli Doue.

Hi gan da beñeil dro  
Gwerzjo neve ato,  
O rei meulodio  
Da grouer an Envo.

Enon ni welo c'hoaz  
Leun a c'hloar hag a c'hraz  
Tud savet a bep lec'h,  
Beleien ha menec'h.

Gwerc'hezed a bep noad  
Sentezed a bep stad,  
Grage, intanvezet  
Gant Doue kurunet.

An oll Eleigo  
War ho eskeligo  
Ker mignon, ker ru-ben  
A nijo dreist hon pen.


A c'hour-nijo dreist-an  
Evel eun tol gwenan  
War vleun en eur parkad,  
Gante son ha c'houez vad.

Enon welimp ive,  
Tanet a garante,  
Hon tado, hon mammo,  
Hon breudeur, tud hon bro.

O kaeran euruzdet,  
Na mad eo da garet !  
Te ro d'imp disc'hlac'har  
Kreiz poanio an douar.



  
**An A, B, K, Breizek.**

  
**Kan 1. Dom Herry.**

**A.**

An den speredeg ha gwirion  
 Veul ha kar he vro a galon. (*bis.*)

**B.**

Breiz eo hon bro, Breziaded omp,  
 Karet, dreist-oll, Breiz a renkomp.

**K.**

Kemend he c'har a renk c'hoantat  
 Rei d'ezi enor ha brud-vat.

**D.**

D'ezi enor en deuz roet  
 An hini eul levr en deuz groet.

**E.**

Eul levr, o tastum tro-war-dro  
 Kaeran kanaoueno ar vro.

**F.**

Fallet eo bet d'ean diskoue  
 Ne n'omp ket sot, ken-neubeut gwe.

**G.**

Gout a raï breman ar geriz  
 Hag hen deuz speret ar meziz.

H.

Hi lavare : « na vleun ervat  
» Nemed ar greun dibabet , vat. »

CH.

Chetu ar greun ha na vleun ket :  
Kalon divad an den kalet.

C'H.

C'hoarzet c'hoaz war-n'omp , Gallouet ;  
C'hoarzi c'houero eo a refet.

I.

It da glask en dro d'ho kerio ,  
Gwersjo ken kaer hag hon gwersjo !

J.

Joao mezuz , ha netra ken ;  
Er c'herio braz a glask an den.

L.

Labourad a ra d'ar zulio ;  
D'al lun a ia d'an tavernio.

M.

Mavel a ra , pa zeu he ze ,  
Ken dizonj evel eul loen gwe.

N.

N'eo ket evelse e vevomp ;  
Bretoned ha kristenien omp.

O.

O skuillan c'houez war an douar ,  
Hon euz sonj a vene kalvar.

P.

Pa skuillomp lomou c'houez , avat ,  
Ho doug da Zoue hon El mat.

R.

Roue ar Zent hag an dud paour ,  
Ho mir en eun orzelig aour.

S.

Sellet a ra oute bepret :  
Pa vo tre-walc'h ni vo galvet.

T.

Trei a reomp ta hon ine ,  
Hag hon lagad , war-zu an E.

U.

Un deiz ec'h imp d'ar baradoz  
Da veuli Doue en hon poz.

V.

Va zud vad ! enon e kanimp ,  
Enon gwersjo kaër a glevimp.


W.

War an douar , en eur c'horto ,  
Ha war ar mor , ni a gano.

Z.

Ze a raï didu d'hon speret ,  
Er poanio kalet euz ar bed.





# PEDEN AR MOUSSIK BIAN

## D'AR WERC'HEZ.

War don : *Potred Plouilliou. Kan 75.*

Ma mammik gez ha ma ferson  
A lavare d'in bemde  
Ho pidi a greiz ma c'halon  
Ha da noz ha da veure.  
Ma chelaouet, Gwerc'hez santel,  
Evit mamm ho kemerann,  
Eur zellik hep ken, ia ! eur zell  
War ar paour moussik bian !

An evnedigou pa greskont  
A ia er mez eus ho nez :  
Da gentan gaud aon e nijont ;  
Ho mamm zo war ho evez.  
Pell man ma mamm, Gwerc'hez santel,  
Evit mamm ho kemerann :  
Eur zellik hep ken, ia ! eur zell  
War ar paour moussik bian !

Pa m'euz bet laret kenavo  
D'am mamm gez war he gwele :  
Pegoulz, em-hei, e vi distro !  
Ha ma mamm baour a wele.  
Dinec'het-hi, Gwerc'hez santel,  
He foan eo ma foan vrasan :  
Eur zellik hep ken, ia ! eur zell  
War vamm ar moussik bian !

Ma c'hoarik vad, ma c'hoar Anna  
A iel d'an iliz bemde  
D'ho pidi c'hoaz, itron Varia,  
Vit ma zad, vidon ive,

78 E


Chelaouet-hi, Gwerc'hez santel,  
Eun ine diouz ar gwellan :  
Eur zellik hep ken, ia ! eur zell  
War c'hoar ar moussik bian !

Pa iemp da laret hon peden  
Hon daouigou d'ho chapel  
Ma c'hoar lare : « Sell eun dolen  
« War-n-hi ar Werc'hez santel  
» Hag a c'hoarz ouzimp gant true !  
( A oamp enn oad teneran , )  
» Ma sellet ha ma breur ive  
» Ar paour kez moussik bian ! »

Enn hro tolen , o Gwerc'hez kaer,  
E weler ho mab Jezuz  
War ho ti-vrec'h, bugel dister,  
Ken mad, ken karantezuz.  
Ho mab dinac'h netra ne hall,  
D'ac'h, mamm ar c'halloudekan,  
Gallout a hellet ta diwall  
Ar c'hez paour moussik bian !

Ma mamm a lare d'in liez  
Eo mestr a bep tra Doue ;  
Mes Jezuz zo Mab ar Gwerc'hez,  
Petra n'hell mamm eur Roue ?  
Ma diwallet, Guerc'hez santel,  
Evit mamm ho kemerann ;  
Eur zellik hep ken, ia ! eur zell  
War ar paour moussik bian !





**KENTEL AR VUGALE.**

**Kan 15. Dom Herry.**

Chetu, bugale, an dro-vad  
Da vevan en kristenien vad :  
Sentet eta ouz ma c'hentel,  
Ha c'houi rei eur vue zantel.

Pa zifunet en ho kwele,  
Roet ho kalon da Zoue,  
Groet sin-ar-groaz, leret goude,  
Gant fe, ha spi ha karante.

Leret : « Me ro d'ac'h, ma Doue,  
» Ma c'halon, ma c'horf, ma ine :  
» Groet ma vin den mad, ma Doue,  
» Pe vervel rok ma tei an de. »

*Benedicite*, rok ar pret,  
Ha graso goude, leveret ;  
Marteze n'ho po boed bepret  
Mar n'hoc'h euz sonj euz ho laret.

Ho laret ra an evnigou  
Klujet er c'hoad war ar brankou,  
Vid eur greun ed, vid eur prenvik,  
Evid eul lom gliz, eul lomik.

